


8N1-1-018



13.

Mez eur beleg euz ar Porzou
 A red buhan var ho roudou,
 Kemer a ra var an aoter,
 En tabernacl, Korf hor Zalver.

) bis.

14.

Skueriet bepred gant eur beleg
 Ker zantel ha ken kalonek,
 Karomp Jezuz hed hor buez
 E sakramant he garantez.

) bis.

15.

Itron Varia ar Porzou,
 Digorit deomp porz an Envou,
 Hag en distro ni a gano
 Meuleudi deoc'h ha d'oc'h hano.

) bis.

IMPRIMATUR :

Corisopiti, die 8^e Aug. 1919.

+ ADOLPHUS,

Ep. Corisopiten. et Leonen.

Kemper, moulet e ti de Kerangal.

Kantik nevez

EN ENOR DA

ITRON VARIA AR PORZOU

Var don : *E Sakramant ar Binien.*

1.

Klevet hón deuz mouez ho kleier
 Dreist hor c'hoajou, hon-lanneier,
 Deut omp ama d'ho saludi,
 Gwerc'hez Santel, ha d'ho pedi.

) bis.

Diskan.

Itron Varia ar Porzou,
Stereden vor, dor an Envou,
Bezit eun deiz ouz hor gortoz
Var dreujou porz ar Baradoz.

) bis.

2.

Ama quintet var an huel
 En amzer goz voa eur c'hastel,
 Eur c'hastel kaér azioc'h ar ster,
 Savet evit diouali ar ger.

) bis.

3.

Gwestlet e voue gant hon tadou
Deoc'h-c'hui, Gwerc'hez, mam ar Porzou,
Dreizoc'h eo bet kastel ha ker } bis.
Diouallet mad e pep amzer.

4.

Deoc'h-c'hui, Gwerc'hez, hirio ive
En em vouestlomp korf hag ene,
Hon dioualfit hed hor buez, } bis.
C'hui eo hor Mam, hor Rouanez.

5.

Aman gwechall, hervez ar vrud
E c'hoarvezaz meur a vurzud,
Burzudou kaér hag a ziskuez } bis.
Peger braz eo ho madelez.

6.

Ama ar c'horf hag an ene
'Gav ar iec'hed hag ar pare,
Ama c'hui glev kement hini } bis.
A vir galon deu d'ho pedi.

7.

Ezom hon deuz euz ho krasou,
Braz eo, siouaz ! hon ezommou ;
Mez ni a voar oc'h gallouduz } bis.
Er Baradoz dirak Jezuz.

8.

P'edo gwechall var an douar
Jezuz zente var ho lavar :
Var ho koulen eured Kana } bis.
A velaz he vurzud kenta.

9.

C'hui lakeaz Jezuz er bed,
C'hui her magaz e Nazareth ;
Penoz hirio barz an Envou } bis.
E ve bouzar d'ho pédennou ?) bis.

10.

Tolit eur zell, Gwerc'hez santel,
Var gement den deu d'ho chapel
Da bardouna ha da bedi, } bis.
Truez out'ho, Gwerc'hez Vari !) bis.

11.

C'hui a garaz hon tadou koz,
Hag a skuillaz varn'ho bennoz,
Karit ive ho bugale, } bis.
Grit ma heuilliut lezen Doue.

12.

Brema zo tost da bemp kant vloaz,
E voue ama brezel ha laz,
Tud dizoue, kriz ha fallagr } bis.
A glask laërez an Hostiou Sakr.) bis.